

Diabarzh ar c’hastell

An tour mervent

An dan


 ▲ Koki Watanabe, « Possession ovale », 2002

An oberenn-mañ, gant an arzour japanat Koki Watanabe, a oa bet krouet a-benn an dalc’h ag an « Arz er chapelioù » e 2002. Prenet e oa bet gant kêr Bondi, gant skoazell ar C’huzul-departamant ha Kef ar fiziadoù, ha staliet er c’hastell goude-se. Un oberenn da welet ha da glevet àr un dro eo. E-barzh bouloù rousin ez eus traezoù-mor dastumet àr aodoù Breizh (bezhin, kregin...). Pep boul zo istribilhet ouzh ur fun vetal ha strilhoù dour a red a-hed ar funioù. En ur gouezhiñ en oglenn edan, e ra an tapennoù ur son dishañval hervez stumm ar voul o deus riklet arnezhi. Gouleier lipet-kaer, bannoù sklêrijenn moan anezhe, a beurachu an oberenn.

Rez-an-douar



▲ Oaled kastell Koedkandeg

An estaj kentañ



▲ Framm an doenn

Ar c’hastell-mañ, gant an arzour japanat Koki Watanabe, a oa bet krouet a-benn an dalc’h ag an « Arz er chapelioù » e 2002. Prenet e oa bet gant kêr Bondi, gant skoazell ar C’huzul-departamant ha Kef ar fiziadoù, ha staliet er c’hastell goude-se. Un oberenn da welet ha da glevet àr un dro eo. E-barzh bouloù rousin ez eus traezoù-mor dastumet àr aodoù Breizh (bezhin, kregin...). Pep boul zo istribilhet ouzh ur fun vetal ha strilhoù dour a red a-hed ar funioù. En ur gouezhiñ en oglenn edan, e ra an tapennoù ur son dishañval hervez stumm ar voul o deus riklet arnezhi. Gouleier lipet-kaer, bannoù sklêrijenn moan anezhe, a beurachu an oberenn.

An oberenn-mañ, gant an arzour japanat Koki Watanabe, a oa bet krouet a-benn an dalc’h ag an « Arz er chapelioù » e 2002. Prenet e oa bet gant kêr Bondi, gant skoazell ar C’huzul-departamant ha Kef ar fiziadoù, ha staliet er c’hastell goude-se. Un oberenn da welet ha da glevet àr un dro eo. E-barzh bouloù rousin ez eus traezoù-mor dastumet àr aodoù Breizh (bezhin, kregin...). Pep boul zo istribilhet ouzh ur fun vetal ha strilhoù dour a red a-hed ar funioù. En ur gouezhiñ en oglenn edan, e ra an tapennoù ur son dishañval hervez stumm ar voul o deus riklet arnezhi. Gouleier lipet-kaer, bannoù sklêrijenn moan anezhe, a beurachu an oberenn.

Oaled ar sal a enor, e mein liesliv, ag ar XVI^{vet} kantved, a za a gastell Koedkandeg e Lokmaria-Gregam (tost da Wened). E 1960 e kinnige hennezh kouezhiñ en e boull. Evit mirout oute a vout distrujet e tivizas kêr Bondi preniñ div oaled hag un tremen-pladoù a lakaas staliñ e kastell ar Roc’haned. Diskouez e ra oaled ar sal a enor ur c’hinkladur pinvidik gant ardamezioù familh ar Chohaned, a oa perc’henn àr maner Koedkandeg er XVI^{vet} hag ar XVII^{vet} kantved.

An hent-ged

An digorioù, a c’heller gwelet dreze kêr a-bezh pe dost, a oa goloet gwezharall gant stalafioù bihan toullet en o c’hreiz evit gellout tenniñ gant arbalastroù.

E penn an hent-ged ez eus bet miret div gambr-aez – anezhe darioù toullet hepken, lakaet àr ur san toullet e ledander ar vagoer, hag é tiflukiñ en douvezioù.

Ar palier kornôg

E penn kentañ ar palier ez eus ur rummad delwennoù sent ha santezed ag ar XVI^{vet} hag ar XVII^{vet} kantved hag a za a barrez Moustoer-Remengol (un ugent kilometr bennak er su da Bondi). Prenet e oant bet gant ar sindikad touristerezh e 1929 – evit mirout na vehent strewet e pep lec’h d’ur mare ma kinnige o savadur orin kouezhiñ en e boull, àr a seblant. Goude-se e oant bet roet da Gêr Bondi o lakaas er c’hastell e 1984.

E penn ar palier, e ta an oaled, evel hini ar sal a enor, a gastell Koedkandeg. Gwelet a reer arnezhi ur c’hinkladur gant ardamezioù adarre, asambles gant menegoù relijiel e latin.

Ar re zo bet é chom er c’hastell lerc’h-ouzh-lerc’h

Ar Roc’haned a oa bet é chom er c’hastell a-vareadoù betek fin an XVIII^{vet} kantved. Goude-se e oa bet annezet lerc’h-ouzh-lerc’h gant :

- an isprefeti ha sal-dalc’hioù lezvarn sivil Pondi (1800-1839)
- ar jeneral Bernadotte, anezhañ penngomandant arme ar C’hornôg karget da stourm ouzh ar Chouaned, a stalias e benngarter eno (Mae-Mezheven 1801)
- seurezed Kermaria, a grouas ur skol-lojiñ evit ar merc’hed (1841-1884)
- ur mirdi breizhat diazezet gant Jérôme Le Brigand (fin an XIX^{vet} kantved)
- Gward Sant Ivi (klub sport kêr), skouted Frañs, un nebeud familhoù a Bondi annezet er palier kornôg a oa rannet e meur a bezh d’ar c’houlz-se (hanterenn gentañ an XX^{vet} kantved, gant un arsav e 1939-1940)
- e-pad an Eil Brezel-Bed : soudarded a Bolonia, ha goude-se emrenerien vreizhat (Mezheven-Gwengolo 1940)

An tour kornôg

An hent-ged



Kambr an dugez



Treuzfurmet eo ar pezh-se en ur salig-banniñ hiziv an deiz. Hervez an hengoun e oa ar sal-se al lec’h ma kouske dugez Roc’han pa zae da Bondi. Ar mod m’eo kinklet ar pezh – gant lambruskoù kinkliñ ouzh ar sel ha pileroù* nevezklasel a bep tu d’ar skramm – zo arouezus ag an XVIII^{vet} kantved.

Ar palier norzh


 *piler : skor pevarzuek a-sonn a valir un tammig. *bann-kreiz : elfenn a-sonn e pasturaj ur prenestr. *kroazenn : elfenn a-led e pasturaj ur prenestr, a stumm ur groaz gant ur bann-kreiz*.


▲ Stern-aoter chapel Sant Ivi

▲ Lambrusk ar sel

▲ Stern-aoter chapel Sant Ivi

▲ Lambrusk ar sel

▲ Stern-aoter chapel Sant Ivi

▲ Lambrusk ar sel

▲ Stern-aoter chapel Sant Ivi

▲ Lambrusk ar sel

▲ Stern-aoter chapel Sant Ivi

▲ Lambrusk ar sel

▲ Stern-aoter chapel Sant Ivi

▲ Lambrusk ar sel

▲ Stern-aoter chapel Sant Ivi

▲ Lambrusk ar sel

▲ Stern-aoter chapel Sant Ivi

▲ Lambrusk ar sel

▲ Stern-aoter chapel Sant Ivi

▲ Lambrusk ar sel

▲ Stern-aoter chapel Sant Ivi

▲ Lambrusk ar sel

▲ Stern-aoter chapel Sant Ivi

▲ Lambrusk ar sel

▲ Stern-aoter chapel Sant Ivi

▲ Lambrusk ar sel

▲ Stern-aoter chapel Sant Ivi

▲ Lambrusk ar sel

▲ Stern-aoter chapel Sant Ivi

▲ Lambrusk ar sel

▲ Stern-aoter chapel Sant Ivi

▲ Lambrusk ar sel

▲ Stern-aoter chapel Sant Ivi

▲ Lambrusk ar sel

Ur chapel dediet d’al lidoù katolik ha protestant a bep eil

À-dro **1500** ► Pa oa bet savet e oa bet gouestlet ar chapel gatolik da Sant Meriadeg.

1560 ► Ar beskont Herri I^{añ} Roc’han, aet a-du gant mennozhioù an Disivoud, a ziazez iliz protestant Pondi.

1589 ► E-pad brezelioù ar C’hevre eo aloubet ar c’hastell e-pad 9 blez gant soudarded katolik an dug Merkeur.

1598 ► An Edid a Naoned a laka un termen d’ar brezelioù relijion. Grataat a ra c’hwec’h lec’h-dimeziñ d’ar Brotestanted. Chapel Pondi zo unan anezhe.

1686 ► Blez goude torridigezh an Edid a Naoned, e renter ar chapel d’al lid katolik.

1794-1841 ► N’ouzer ket mat da betra e oa implijet ar chapel.

1841-1884 ► Implijet eo ar chapel gant leanezed katolik urzh seurezed Kermaria.

1884-1974 ► Talvezout a ra ar chapel da bep seurt traoù. Dont a ra da vout ur sal jiminas evit Gward Sant Ivi, da skouer.

1974 ► Gant Josilin Roc’han e vez dediet ar chapel d’al lid protestant en-dro.

Pondi

Kastell ar Roc’haned


^[1] Ar Roc’haned a oa bet é chom er c’hastell a-vareadoù betek fin an XVIIIvet kantved

^[2] Goude-se e oa bet annezet lerc’h-ouzh-lerc’h gant :

